

KIS-364 – Gl. enregistrer. Sz. to record. Al. aufnehmen, aufzeichnen, eintragen

(GE – 19 06 89)

Dont a ra an notenn-mañ da glokaat KIS-361, La-09, pp. 128, hh. : Et. **-graph-, -gramm-**.

Amkan an ober desellet, e domani ar c'halvezerezh, eo derc'hel roud eus un anadenn war-benn he studiañ, dedeurel eiladoù anezhi, h.a.

Unneuz a-walc'h eo treug ar sterluniañ er yezhoù :

E Gl., **enregistrer** ♦ **registre** "levr ma enskriver devoudoù, anvioù, h.a. war-benn derc'hel koun anezho" ♦ iLa. **regesta** "traoù a zaneveller, roll" ♦ La. **regerere** "digas, kas kuit ; adkas, askas ; diskas ; kas pelloc'h ; degas ; treuzkas ; treuzskrivañ ; lakaat dre skrid".

Astennet eo bet ar ster eus an oberoù denel d'ar gwezhioù ardivinkel.

E Sz., **record** ♦ hGl. **recorder** "degas da goun" ♦ La. **recordari** "degas da goun, kounaat, derc'hañ" ♦ La. **cor** "kalon, kaoued, spered".

Heñvel an astenn ster ouzh an hini c'hoarvezet e Gl.

En Al., **aufnehmen** "dastum ; degemer ; darbenn ; (Fizik) lugañ ; (Bevoniezh) euvriñ". Al. **aufzeichnen** "tresañ, notennañ". Al. **eintragen** "enskrivañ, marilhañ".

En Et., hon eus eñ gwelet, e reer peurliesañ gant deveradoù diwar **-graf-** da lostger.

E Br. lennegel e kaver **marilhañ, diellañ, enrollañ, enskrivañ**. Diwar astenn ster ivez ez eus bet argerzhed ha roet da **enskrivañ** ar ster desellet amañ, sk. : **"Enskrivet** e vez evel-se war-eeun e stumm ur grommenn argemmadurioù an aerwask a-gevreizh d'an amzer" (SADED Fiz-18, p. 9) ; "aerbouezer **enskriver**" (id., ibid., p. 10).

E'm notenn KIS-361, La-09, pp. 131, 133, e venegan ar valleeg **treseñn**, **tresennañ**, a zo a dra sur un diskoulm azas all.

En hevelep notenn, pp. 131-132, e kinnigan al lostger **-(g)wezañ** hag ar skouerioù **luc'hwezañ**, **sonwezañ**, h.a.

Evit an termen hollek o tastum kement **Xwezañ** 'zo, kevatal end-eeun d'an termenoù Gl., Sz., Al. diaraok en o ster arnevez, e kinnigan **lerc'hwezañ**, eleze "reiñ furm (**gwez**) da roudoù (**lerc'hioù**) un anadenn". E-se, **luc'hwezañ** a ve kement ha reiñ **gwez** da **lerc'hioù** al luc'h, gant gerioù all : **lerc'hwezañ** al **luc'h**.

En doare-se e lakaer e kerz lavar ar ouezoniezh hag ar c'halvezerezh ur strobard damheñvelsterioù, pep hini o kennotañ un urzh desellout disheñvel.